

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAN (23)

Ramzed. Kaoured. Ramzed ha kaoured kounnaret. Kounnaret ha marnaoniet. En andon hon lennegezh vodern. Hepte ne vije bet netra, seurt. E vije bet ur gouelec'h hep liv na tousmac'h, skubet gant avel an netra. Dreist-holl ur gouelec'h hep tamm goanag, hep tamm prenestr war an amzer dazont. Ya, ur gouelec'h... Gaonac'h. Ha tavet hon gweledigezh da vat...

Hag ur gounnar, Salver, unan n'eo ket tavet c'hoazh ha na davo biken... Kounnar ha doñjer a-enep un traoma dinac'het : hini ar brezel kentañ lakaet da vras gant ar bolitikourien, gant ar reoù a oar ober farloterezh gant an istor.

Ha souezhet e vêr o welet penaos zo savet un Abeozen da zislonkañ e zoñjer abalamour d'ar brezel daonet-se ? Ret e oa kaout kalon evit sevel skridoù diwar-benn an darvoudoù gant e soñjoù en o c'hreiz... sec'h met gwirion, trist met leun a spi en amzer dazont... Siwazh, ne voe ket ar brezel-se an hini diwezhañ, pell a vezañ.

Ret e oa kaout kalon en personel evit distreiñ war gwall zegouezhioù bevet gantañ, ha ret e oa kaout kalon al lennegezh evit leurenniñ kemend-all a euzhajoù euzhus... « Ober a ra gant ur frazennadur strizh, ur stil diglink, ur stumm eeun, en abeg d'an danvez (ne voueter ket hunvreoù kaer gant ar brezelioù...) hag en abeg d'e stummadur klasel, ivez », eme Gwendal Denez en e skrid kinnig da zanevelloù « Dremm an Ankoù ». Gwendal, eñ ivez, test aketus d'hon lennegezh.

« N'emañ ket Elies (Abeozen) er brezel evit difenn ar C'hornôg, evit stourm ouzh ar varbared, evit dougen bri d'e Rejimant pe c'hoazh evit trec'h ar Sevenadur pe ar Gwir... Aze emañ evit ober e 'labour soudard', ha buan e vez eo ret dezhañ, da gentañ, stourm evit chom bev pa verzh n'en deus ket tañvaet c'hoazh plijadurioù ar vuhez », emezañ c'hoazh.

Poltred un den kaset d'an talbenn, divizet gantañ seveniñ e zevel, seveniñ n'eo ket ar penaoz nag ar perag met ar pezh a oa bet ordrenet, ma mui na maez ha bezañ test pervezh ha feal d'an heug. Poltred un den hag a zesko kalz ha diwar kement-se a ranko sevel a-enep... Mont a-enep an drailh, pe gentoc'h a-enep gwikiere an drailh...

Gant ur spi aet da ludu ne vije mui brezel ebet ken...

Un « etrebroadel » eus an dud gwasket gant ar brezel zo. Ur wezhig bennak e c'hoarvez, evel pa vefe ur burzhud (a lârf e ar person en e gador-brezeg). I-Mari, ma I-Mari, a gonte evel-se : « C'hoarvezet ganimp en goudor hon fozioù en em gavout tost da fozioù an Alamanted, a oa bet dimp evel ma oant dezhe a bep eil, hervez e vije lañs pe dilañs ganimp pe gante. Ur c'houlz a baouez en emgann. Da gentañ an eskemmoù entre an daou du a oa just ur ger pe daou betek mont da frazennoù, pe seblant frazennoù. Staliet un doare fiziañs entre an daou du. Kanaouennoù ivez, eskemm sigarettennoù... n'int ket ken dañjerus ha greunadennoù... Just a-raok ar c'houlz ma rankfomp en em lazhañ adarre. An Alamanted-se, evelomp, n'o deus ket goulennet mont d'ar brezel. Eveldomp o deus kuiatet tad ha mamm, gwraeg, bugale... »

Ha dreist-holl geriennoù diwezhañ ma I-Mari : « Pegen droch ha direzon eo ar brezel ! Bezañ e rankfomp gortoz c'hoazh evit kaout ar peoc'h entre ar pobloù... ».

Abeozen ne soñje ket nebeutoc'h, hag e bluenn skrivagner zo bet evel un aotenn, an daou-du dezhi lemmet mat : lemel tarch ar brezel eus e vuhez personel, hag ivez komz en anv ar miliadoù ha miliadoù a broletaerien kaset d'an drailh hep goût perak. Ya, kalz zo bet lazhet, muntret a vefe reishoc'h lâret, hep n'o dije komprenet seurt en degouezh. Soñjit er Vretoned bet fuzuilhet abalamour ma respontent « ya » evel ma responte « ja » an Alamanted. Ur vro, ur yezh...

Goût a rae mat hon Abeozen e oa bet, abaoe faezhadenn (hini piv avat ?) 1870, ur prientiñ d'an drailh a dlee dont dre ret. Soublañ pennaennoù an deskadurezh er skolioù nevez lakaet da ret : e-lec'h deskiñ ar vugale da zigeriñ gant o mousc'hoarzhoù hag o c'hoarzhoù dic'hargadennet d'an amzer dazont plaen ha denel, o deus prientet ar vugale d'ar brezel, o deus stummet o speredoù da vezañ soudarded soublet ha doujus da zont ar Republik veñjurez. Ha grit ar gont, mar plij, eus ar c'hezeg badezet « Alzas » pe « Loren » en menajoù ar vro just a-raok gwengolo 1914.

Hon Abeozen a ouie kement-mañ, pe da vihanañ e teskas kement-mañ buan. Dont a reas en-dro merket, e kounnar, ya e kounnar. N'eo ket souezh e juntras gant paotred all yaouankoc'h a-boanik e

kounnar ivez. Ramzed ivez. Mont en tu all d'ar gounnar, ha d'ar glac'har a oa stourm ha krouiñ. Met an daou zo liammet.

Reoù all n'o devo ket ar memes chañs da zistreiñ d'ar gêr, evel Yann-Bêr Kalloc'h. Unan a gompreno diwar e goust pegen euzhus eo ar brezel, evel da Bask 1917 : « Kenavo, Iwan, lous eo ar brezel, setu. » Ar brezelioù a zistruj ar c'hig, met dreist pep tra ar brezel a zistruj ar speredoù... dizamant.

Elevez ar skrivagner, hon Abeozen, douget gant e stil « diglink » a ro nerzh d'an danevelliñ :
« Antronoz, e Rochebides, Erwan hag e geneiled a zo tennet er-maez eus ar c'harrdi m'o deus kousket ennañ gant trouz sonerezh er straed. Laz-seniñ ar rejimant eo, o c'hoari dirak arched Posteg, douget d'ar vered :

*Mourir pour la patrie,
C'est le sort le plus beau,
Le plus digne d'envie...*

Ar ganenn-veur vrabañser-se, a zo gwall heñvel ouzh latin ar barzh Horatius a skampas ken skañv diouzh emgann Philippi en ur deurel e skoed war vaez-ar-stourm.

Ur vorenn rec'hus a zo stignet etre daoulagad Erwan ha sklêrijenn heol klouar ar goañv...

'Fellet en deus dezho', eme ur soudard kozh, 'drouklazhañ unan bennak ac'hanomp betek ar vunutenn ziwezhañ. Sed amañ c'hoazh ur paourkaezh ma vo skrivet war e groaz prenn : Marv evit ar Vro !' » a skrive an Abeozen diwar-benn darvoudoù an ehan-brezel da vat. Lazhañ betek penn evit krouiñ « merzherien » ar vro betek penn. Un euzhaj all...

Skridoù ha soñjoù kenstur da reoù Loeiz Herriaou, Loeiz Herrieu mar kavit gwelloc'h, unan hag en devoa skrivet dez ha dez e-keit ma oa dindan lifre ar Republik, eñ ivez. Taolenniñ ar vuhez pemdez, taolenniñ ar pezh a c'hoarveze. Hon Abeozen en devoa fardet un dezrevelliñ lennegel diwar e eñvorennoù digor evel ur gouli breinet gant ur flus disliv ha flaerius. Kontañ ha rentañ e zoñjer. Hon Loeiz a skrivo diouzh red an amzer, gant un adkempenn bennaket, en stumm un dezlevr. Kammdro an Ankoù en par Dremm ar memes Ankoù. Div vuhez dindan ar memes glaveier tan, dindan ar memes urzhioù en anv ar Sevenadur... hag ar memes kizidigezh ouzh an torfed m'eo ar brezeliñ. Ur gizidigezh estaolet pep hini diouzh e zoare, diouzh e boanioù...

Ur pennad entre un toullad reoù all gant hon Loeiz, entre fent ha goap, truez ha mantr :
« 5-10-1917. Kavet a ran, dre daol degouezh, ur soudard d'am eiliñ, e-mesk ar re gozh daet ag ar c'holonial. Ur brav a skritur en deus.

Ag an deiz kentañ e teraou an denig-mañ da zispleg e vuhezegezh trist din : ur vaiouez en doa hag en deus troet kein dezhoñ a-c'houde nend eo ket mui e-tal he brozh. Kavet en deus-eñ ivez ur *vamm-baeron brezel* hag a skriv dezhoñ 'gozik bemdez. Dimezet e oa-hi ivez, met he fried, *Français* pennkil-ha-troad el e-leizh ! en deus tec'het d'ar broioù estren evit pellaat doc'h ar brezel hag e zañjerioù. Ha ma skrivourig en deus kemeret en he c'halon al lec'h goulle. Bremañ e karahent o-daouig en em zastum evit sevel un neizhig arall. Da bep oad e krog ar gelionenn dall en den ! É lakaat o oadoù bernoc'h-bern e tostaont da bevar-ugent ! Ne vern ! Yaouank eo o diavisted. Gwellañ zo, bout o deus c'hoazh ur restaj relijion, ha lezennoù an Iliz a za da sevel ur vagoer etre o div garantez. Da ouiet petra a vo ar c'hreñvañ : magoer pe karantez ?

Pezh zo anat evidon a zo dalledigezh an huanadour-mañ, dousto dezhoñ bout bet skaotet ur wezh dija. Un tammig drapo triliv en deus ar vamm-baeron kaset d'he filhor hag àrnezhoñ *Kalon Sakret Jezuz*, brodet dindanoñ get neud melen : *Cœur de Jésus sauvez la France !* Nag a labour a raer dezhi d'ober, d'ar Galon Doueel-se ! na labour truek !

Ma skrivourig a gav kaer-bras drapo e vamm-baeron : *'Voyez, eme-eñ din, comme elle travaille bien ma marraine !'*

Ne gavan ket-me ; da gentañ rak ne welan tamm braventez erbet en ur galon gwadek, tennet ag ur c'horf, zoken pand eo hani hor Salver eo, a pa vez staget àr un tamm danvez, daousto dezhoñ kaout tri liv. Ha d'an eil, rak nend eus netra souezhus el labour a welan.

Gwir eo nend eo ket lunetoù Kupidon àr ma fri... »

Moger pe garantez, eme hon Loeiz diwar-benn an daou bichon. Marteze eo e istor-eñ ivez ?

Ar selloù war ar brezel, ar brezelioù, zo diwar melezourioù liesdremmek : kaleidoskopiñ ar vignoniezh etre an aktourien en despet dezhe, ar fulor a-enep an heug hag an euzh, ar gounnar a-enep falc'herezh dall ha diremed an Ankoù, ya... hag ivez an naon bras savet en deun ar fozioù fankek da gaout frankiz, evurusted... ar gwir da vevañ. Tra ken.

Herve Bihan

Levrlennadur

Gwendal Denez, Fañch Eliès-Abeozen (1896-1963) : sa vie, son œuvre, Tezenn, Roazhon 2, 1988.

Gwendal Denez, Rakskrid in Abeozen, Dremm an Ankoù, Danevelloù, Al Liamm, 2014, pp. 7-14.

Ernst Jünger, Orages d'acier, Christian Bourgois Editeur, 1970 (embannadur orin alamanek en 1961).

Henri Barbusse, Le Feu, J'ai lu, Flammarion, 1957 (priz Goncourt 1916).

Roland Dorgelès, Les croix de bois, Albin Michel, 1919.

Abeozen, Dremm an Ankoù, Skridoù Breizh, Brest, 1942.

Abeozen, Dremm an Ankoù, Danevelloù, Al Liamm, 2014.

Yann Lagadec (embanner), Les Monuments aux morts et la mémoire de la Grande Guerre en Bretagne (1914-2024), Annales de Bretagne et des pays de l'Ouest, Tome 132, Mars 2025, Numéro 1, PUR.

Gwendal Denez (embanner), Mémoire et trauma de la Grande Guerre – Bretagne, Catalogne, Corse, Euskadi, Occitanie, TIR, 2010.

I-Mari Bihan (1892-1980) eus Planiel, Eñvorennoù brezel 1914-1918, Dielloù ar familhoù Bihan & Korr.

Loeiz Herrieu, Kammdro an Ankoù, embannet gant François Louis, Al Liamm, 1994.